




DISPUT B
ETRE AR MARO
HAC AN DEN YAOUANQ



AR MARO.

CHÈTE me erru , va mignon ,
Da ober did renta ræzon
Demeus da vuez tremenet ;
Scuis eo Doue eus da velet .

AN DEN YAOUANQ.

Aotrou Doue , piou co emàn
A zo deut qen disonch amàn !
Va speret a zo oll troublet
Gant épouvant eus e glèvet .

AR MARO.

Petra leveres, va mignon ?
 Les da spont, ha cont da ræzon :
 Ha ne vouies-te qet erfat
 E teujen abred pe divezad ?

AN DEN YAOUANQ.

Allaz siouaz ! ne vouien qet
 E cleach donet qen abret ;
 Me sonje dìn, pa voan dispos ,
 Ne varvjen qen e vijen cos.

AR MARO.

Mes alies e poa clèvet
 Ne meus biscoas den espernet ;
 Hac e cleàn an oll falc'had ,
 Cos ha yaouanb eus a bep oad.

AN DEN YAOUANQ.

Allas siouaz ! en joa ar bed
 E voa va speret ocupet ;
 Em yaouanqis voa va fianç ,
 Hac em mignonet va esperang .

AR MARO.

Penos, den sot hac aveurtet ,
 Ne voas-te qet avertisset

Da reformi da voel vue,
Pa ne voas qet sur a un de?

A N D E N Y A O U A N Q.

Allas! me vél on faziet;
Mar plich guenêch c'hoas depordet:
Roit dîn ur blavez termen,
Ma rìn qen mervel pinijen.

A R M A R O.

Penos e fel dide ober
Pinijen e qen ber amzer,
Pa na heus gêt bete vremân,
Ha te pel zo var ar bed-mân?

A N D E N Y A O U A N Q.

Me bromet deoc'h, a dra certen,
E rìn promptamant pinijen
Da repari va yaouanqis,
Ma roit dîn termen ur mis.

A R M A R O.

Bet avoalc'h ec'h euz-te amzer,
Ma carjes ober da zever;
Mes ne alles pelloc'h apel:
Erru an heur, red eo mervel.

AN DEN YAOUANQ.

Pa n'en deo qet ho polente
 Va lêzel qeit-se en bue,
 Mar plîch guenêc'h, da vianâu,
 Un devez c'hoas a c'houleñnan.

AR MARO.

Ha-ça ! bremân paciantet,
 Erru an heur, ret eo monet;
 Rac'še-ta sonch e coël vue,
 Ret eo monet dirac Doue.

AN DEN YAOUANQ.

Penos eta, mervel zo ret
A greiz va nerz ha va ye'chet!
 Penos quitât va desseniou,
 Va joa, va c'herent, va madou ?

AR MARO.

Divead out bremâ da ouela,
 Homân eo da heur diveza :
 E zan da rei did an tol mortel,
 En heur-mâ e renques mervel.

AN DEN YAOUANQ.

E choulen sicour digant e guerrent ha mignonet.

O va c'herent ha mignonet,

En han' Doue va sicouret;
 Scöet oun gantàn d'ar ïmaro,
 Dent d'am sicour, hastit a fo.

A R B R E U D E U R.

Evit bremàn ne allomp qet,
 Beza on eus affer bresset;
 Pa retornimp, ni a velo.
 N'och eus qet a fæçon varo:

A R M A R O.

Guel, den sot ha den aveurtet,
 Petra respont da vignonet;
 Avou bremàn, den diavis,
 Peguer trampus ê yaouanqis.

A N D E N Y A O U A N Q.

Guir a leret : me zo trumpet
 Gant yaouanqis ha mignonet;
 Bremàn me ro deze mallos;
 D'am oll malheur ez int bet cos.

A N D E N Y A O U A N Q.

Ec'houl'en sicour digant Doue hac ar Verc'hes.

Me ho supli, ô va Jesus,
 Ha c'hui, Guerc'hes, mam druezus;
 Me o ped, dre o madelez,

D'am sicour c'hoas, me, pec'her qèz.

A N A O T R O U D O U E.

Penos ec'h eus an assurang
 Da c'houlen ouzomb asistanç ?
 Bepret out bet hon adversour ;
 Petra ve demp - ni da sicour ?

A N D E N Y A O U A N Q

E c'houlen sicour digant ar Sent.
 O Sent, mignonet da Zoue,
 O pet truez eus va ene !
 Gant an oll oun abandonet ;
 En han' Doue va sicouret !

A R S E N T.

Penos ech eus an ardisson
 Da c'houlen hor protection ?
 Ne c'heus qet miret hor goeliou ,
 N'hac imitet hor vertuziou .

A N D E N Y A O U A N Q

E c'houlen sicour digant e Æl mad.
 O va Æl mad, ô va den qer ,
 Va gardien e peb amzer ;
 M'ho ped va sicourit bremâ ,
 Em nécessite diveza .

AN AEL.

Qement a allen ameus grêt
 Bete vremân en da andret;
 Poent e zeo din d'abandoni,
 Pa ne c'heus qet sentet ouzîn.

AN DEN YAOUANQ.

Me vel erfad ê tremenet
 Va amzer da veza sicouret;
 Bevet emeus en libertin,
 Doue a rent justiç erfin.

Em maro em diles Doue,
 Pan boan dilêzed em bue;
 Rezistet meus de oil graçou,
 Hac em refus em goulennou.

AN DEN YAOUANQ.

E quitaat e guerent hac e vignonet.
 Dilezet oun en abandon;
 N'en deus mui evidon pardon.
 Adieu querent ha mignonet,
 Adieu bed fall ha milliguet.

AN DEN YAOUANQ.

E quitaat joaüstet ar bed-mân.
 Adieu grandeur ha bombangou,

Henoriou ven ha triomphou ;
 Adieu d'an traou-eus an douar ;
 Adieu d'an ên, adieu de chloar.

Mallos dar vam, mallos d'an tad
 A zo bet ouzin qen ingrat.
 Mo deus grêt din coll va ene ,
 D'am beza lezet em liberte.

E zàn da veza enterret
 En ifern gant an dud daonet ,
 Da lesqi ebars er flamou ,
 Da james gant an diaoulou.

A possibl ve, ô va Doue ,
 E serfac'h ouzomb dor an eê !
 Obtenit demp , ô va Zalver !
 Eur plaç en ho cloar eternel.

F I N.

E MONTROULEZ, e ti LÉDAN, e ru ar Vur.